

Tud ar vro - Bro Leon
Roll kanaouennoù - Dañs a-benn

An den klouedet

Fañch al Luch zo ur paotr kreñv stampet ouzh e zouar
N'eo ket 'n avel o tremen a vefe gouest d'e ziskar

Gros, kofek, divesker lor gouest da lakaat spouron
Eus an araoek eo digor kement hag ur marc'h limon

Ha ma zafec'h da c'hoarzhin ouzh pezh a c'hoarvezas
Siwazh deoc'h, me a gav din sur ho pefe gwall dregas

E-kichen ode Park-bras e gi bihan Loullig
War ur c'had prim a lammas, ha strobet ar paotr Fañchig

Stok e gorf ouzh ar gloued kouezhas ar paotr faro
Hag e benn chomas sanket e gwask ar bizier derv

Kaer 'doa sachañ da c'houde sachañ ha disachañ
E ziskouarn a voude ha ret 'voe dezhañ puchañ

Ret 'voe d'ar paour-kaezh kañfard dibradañ e gloued
An abadenn a voe start mat-tre e oa bet staget

Ha ganti 'dreuz war e choug fuloret e galon
Ha div zrezenn d'e ambroug Fañch a zistroas d'ar gêr

Ar saout a vez pennasket, ar c'hezeg hualet,
Morse ne oa bet gwelet m'en tou un den "klouedet"